

D'AR WERC'HEZ VARI

PATRONEZ BUGALE SANT FRANSEZ

Ton *Theophilus*, pajennou 115 ha 125 eus Kantikou Kemper ha Leon, pe :

1. Rou a - nez an E - lez, Ma - ri, Gwer-c'hez san - tel,
 Gwe - lit e - harz ho treid ho pu - ga - le fi - del;
 E - vel sent hon ur - ziu ni fell d'eomp ho ka - ret,
 Ho meu - li, ho pe - di, Pa - tro - nez ven - ni - get !

2. Bugale sant Fransez o deus e pep amzer
 Diskouezet evidoc'h devosion dener ;
 Na pet gwech eveltan ez int bet daoulinet
 Dirak ho skeudennou, Patronez venniget !
3. Bugale sant Fransez en o holl enkreziou
 A zo bet aketus da gas d'eoc'h pedennou ;
 Atô hag hebdale hoc'h eus oûto sellet,
 Hoc'h eus o dizammet, Patronez venniget !
4. Hon Tad, er « Borsionkul », a yoa en e beden,
 Hag a ouele dourek war stad ar bec'herien,
 Pa glevas eur c'hantik eus an Nenv diskennet,
 Hag ho kwelas, Mari, Patronez venniget !
5. Eno e resevas an Induljans dispar
 Anavezet hirio gant holl dud an douar ;
 Dreizi ar bec'herien goude beza pedet
 O deus kavet ar peoc'h, Patronez venniget !
6. Bugale sant Fransez a voe er penn kenta
 O tifenn dre ar bed ho privilaj kaera ;
 Int-i eo a c'houlas ma vije disklêriet
 Ho « Konsepsion dinam », Patronez venniget !
7. Menec'h an « Urz kenta », an Tadou franseziz,
 A brezeg hoc'h hano, o prezeg ar gwir feiz ;
 Grit ma vo o c'homzou gant Jezuz entanet
 Ha ma tougint frouez, Patronez venniget !
8. C'hoarezed an « eil Urz » o trei kein d'o madou,
 Kent laret kenavo d'ar gêr ha d'o zudou,
 A c'houlas he pennoz, dirazoc'h daoulinet,
 Gwerc'hez ar gwerc'hez, Patronez venniget !
9. Ar Gristenien er bed, a bep oad, a bep stad,
 Bodet en « Trede-Urz » ho kar 'vel o Mamm vat ;
 Mirit-i diouz pep droug ma talc'hint da gerzet
 Gant hent ar binijen, Patronez venniget !
10. Ennoc'h evel gwechall, Rouanez an Elez,
 Eman feiz ha fizians bugale sant Fransez ;
 C'hoant o deus da dreuzi mor ar bed fuloret !
 Kuzet gant ho mantel, Patronez venniget !
11. Ha goude hor maro, pa vimp dirak Jezuz,
 Grit ma vo hor Barner euzomp trugarezus,
 Ma kanimp da viken en Nenvou, kurunet,
 Meuleudi d'eoc'h, Mamm vat, Patronez venniget !